


**Kelou Bro Dardoup**  
**niv.3**

# **Tro dro Landelo**



**Skol An Emsav**



**KAZETENN AR MENEZ**

D  
MAR

PENNADOU KAOZ enrollet gant Anna-Vari MARZIN  
ba' Landelo ha Kleden

KANAOUENNOU enrollet gant YANN MEUR  
ba' Plone ha Kastell Nevez

SKRID savet gant YANN MEUR hag A.V. MARZIN

POLTREJOU gant Andre HELLEG

MAKETENN gant Lena LOUARN



Skol An Emsav  
8 straed Hoche  
35000 Roazhon  
pell.99.38.75.83  
faks.99.63.82.28

eil embannadur-gwengolo 1992



'ba Menez Banal gant Armand Puihander

Ar c'hasedig kentañ a oa bet graet gant tud deus ar C'hastell Nevez, an eil hini oa ur gontadenn gant J.L. AN DU deus Plone, ha bremañ evit an trede hini e vo klevet tud deus Landelo.

Emañ Landelo etre Karaez hag ar C'hastell Nevez. An dud a zo o kaozeal e-barzh ar c'hasedig a zo o vezañ e-barzh ar barrez bremañ. Mes lod deusoute a zo ganet e-barzh e-lec'h all. Ur wech dimezet int deut e-barzh Landelo deus ar parrestioù tro-wardro. Deus Kleden Poher e ta H. MARZIN hag A. GUYADER ha deus Lennon e ta M. KADET. Ablamour d'an dra-se marteze e vo kavet modoù disheñvel da gaozeal. Al lod brasañ deus an amser omp bet da gavet an dud e-barzh o zi, a-benn daspugn pennadoù-kaos, kanaouennoù, rimadelloù... Gwechoù all, int bet enrollet e-pad beilhadoù graet e-barzh ur staj breshoneg savet e-barzh Landelo e-pad miz Eost gant Despenurien Bro Dardou ( 'zo deut da vezañ "Kasetern ar Menez" ).

Arma-Vari MARZIN

**KASTELL GALL**

(kontet gant Armand Puilhandr deus Menez Banal, Landelo).

**A**r c'hoshañ 'vez kavet Kastell Gall, anv Kastell Gall ba' 'n Istor eo tro ar bloavezh 1300. D'ar bloavezh, tro ar bloavezh 1300 oa paseet d'un den, paseet peotramant roet d'un den a oa e anv de Kermelleg. N'ouzon ket deus pelec'h 'oaint deut na petra 'n doaint bet graet, n'ouzon ket gwall gaer, met d'ar bloavezh 1300 vez kavet tres deus oute.

Tro ar bloavezh 1400 warlerc'h, 1420 matrese, e oa unan deus oute, Yann Kermelleg, hag e oa chambellan deus an Dug Jean V ba' Roazhon. Hag hennezh oa unan deus an noblañsoù bras ar vro, ha Jean V an Dug a oa bet tapet ha lakaet prisonier ba' ur maner kozh bennak, hag hemañ, Jean de Kermelleg a oa aet da heul hag 'n doa paseet nebeut mizioù ba'n toull asambles gantañ. Ha, pa oa deut an Dug, an Dug Jean V, pa oa-eñ deut maez deus an toull, ken fouget all evel oa-eñ bet gant e... Kermelleg oa... 'n doa roet ur bern douaroù dezhañ, peogwir 'n doa sikouret anezhañ mat, 'n doa roet ur bern douaroù dezhañ, ba' Logivi-Plougras, Koad Befo ; hag un nebeut bloavezhioù warlerc'h 'n doa roet droad dezhañ, droad justis bras : droad da jujif an dud, d'al laeron, d'ar re o doa lazhet, ha da lazhañ anezho e-unan pa nizent graet re a zroug.

Warlerc'h, un nebeut bloavezhioù -an dra-se oa tro ar bloavezh 1420- tro ar bloavezh 1435 matrese pe e-giz-se neuze, hennezh : J. de Kermelleg, (matrese a oa pinvidik bras hag, kasi sur 'n doa ken 'met ur verc'h anezhañ) 'n doa roet e verc'h da unan e vize graet Chastel deus outañ : Chastel de Mêle. Setu aze tout pezh 'm eus klevet aze. Warlerc'h tro ar bloavezh pemzek kant... nann diwezhatoc'h un tamm mat : 1550, unan deus e baotred, deus e baotred bihan pell warlerc'h,

oa e anv François du Chastel, hag hennezh oa pinvidik bras papred, ha pizh pemoc'h oa-eñ ivez, hag e oa euredet da zigentañ da unan a vize graet Marie de Keroulaz. Honnezh a oa deus kostez Leon aze un tu bennak. Hag honnezh, Marie de Keroulaz, 'zo bet graet ur son warni, hag ar son-mañ moarvat, vez kavet 'barzh "Barzhaz Breizh" papred. Hag ar plac'h 'tañ, hervez ar son, a gave gwelloc'h chom gant tud yaouank he bro, met peogwir hemañ a oa pinvidik, he mamm he doa roet anezhi dezhañ. Hag ar re-mañ a lar e oa-hi marv daou pe dri miz warlerc'h oa-hi degouezhet. Ha koulskoude an istor a lar eo bet daou pe dri grouadur deus outañ, setu sur awalc'h ne oa ket marv diouzhtu anezhi. Feiz ! ur mare bennak e oa-hi marv, ha hemañ all, emichañs, faote ket dezhañ chom intañv, oa euredet d'unan all e vize graet Catherine de Kelin deus outi. Bon ! Marv homañ all adarre, tapet ur wreg all, ha homañ a oa Anne de Kerouzere he anv. Pinvidik bras oa-eñ hag... met moarvat ne oa ket deus ar re gourajusañ tout anezhañ peogwir ba' -an dra-se a oa 'pad brezel al "ligue", pa oa bet ar "Fontenelle", ar re-se c'hoari tout dre amañ- ha eñ oa "chef" ba' Kemperle. Hag un devezh e oa degouezhet ar soudarded warnañ hag 'n doa troc'het kuit kreiz an noz, lakaet dilhad merc'hed, ha deut da guzhat ba' Kastell Gall aze en dro diouzhtu. Hag aze e oa-eñ marv peuzfonnus, warlerc'h an taol-se, hag e oa graet ur bez dezhañ neuze, ur bez... O Feiz ! ur bez brav, O ! Lakaet war-c'horre e vez... hag ar "statu" da heul a zo bet distrujet 'pad ar Revolution. Ar re-se a oa lakaet ba' iliz Landelo. Ha bremañ, ar statu hag ar bez a zo ba'r "musee" ba' Kemper. Kazi sur n'emañ ket tout peogwir ar mein a oa deus kostez ar bez -mein bras- ar re-se a oa bet chomet strewet pad pell ba' r vered ba' Landelo, ha pa oa savet an iliz nevez ba' Landelo en dro e oaint lakaet kostez. Setu 'blamour-se, dibaoe, ba' iliz Landelo zo mein e vez "blason du Chastell" (ha me oar petra tout aze)... zo nebeut mein deus ar c'hostez a vez gwelet "les armes" warne.

☐ baotr bihan neuze, a oa e anv Claude du Chastell. Hennezh a oa euredet tro ar bloavezh 1630 pe giz-se- hag e

wreg, 6 vloaz warlerc'h an eured, feiz !, he doa goulennet an divors deus outañ peogwir ne teue ket 'benn d'ober bugale, krouadur 'bet dezhi. Aet homañ kuit, dimezet d'unan all... Ben ! 'n doa gallet ober hini all 'bet dezhi, hag un devezh Markiz an Ti Meur -eñ e oa e anv, peseurt mod dija, de Karman- 'n doa komañset d'ober anezhi 'blamour hemañ ne teue ket 'benn d'ober bugale d'e wregoù ; hemañ all, Claude du Chastell a fulore hag e oaint aet da c'hoari an "duel", ha oa lazhet Markiz an Ti Meur. Aze war an taol-tañ an Ti-Meur ha Kastell n'eent ket dreist ken.



KASTELL GALL

**Hag**, un nebeut bloavezhioù warlerc'h peogwir eñ a oa pinvidik -Of ! pinvidik bras oa-eñ sur peogwir oa-eñ Kont deus sant Nazer, n'ouzon ket deus pelec'h tout- hag, un nebeut bloavezhioù warlerc'h eñ 'n doa gwerzhet e vaner kastell Gall d'unan a vize graet Jakez de Muzillac. Eñ a oa deut amañ deus kostez Gwened ha oa-eñ euredet d'ur plac'h a vize graet Catherine Douglas deus outi, ha honnezh a oa pennhêrez ba' Pratulo. Setu, deus ar gont-se neuze e oa aet Kastell Gall dindan Pratulo. Hag ur verc'h bennak moarvat o deuint bet peogwir ur Jeanne de Muzillac oa aet pennhêrez hag honnezh a zo bet badezet ba' Kastell Gall, tro ar bloavezh 1670 pe un dra bennak ar mod-se.

**Hag** ar plac'h tañ neuze a oa euredet d'unan a vize graet de Marboeuf deus outañ hag hennezh, Marboeuf, a zo bet kofsailler ba' Parlement de Bretagne (ar Breujoù) ba' Roazhon. E baotred, feiz, bugale 'n doa bet, unan oa Claude de Marboeuf, a oa badezet ba' iliz Landelo tro -me gav dind'ar bloavezh 1700. Hag hennezh a oa bet... me a gav din e oa-eñ bet prezidant deus ar Parlement ba' Roazhon. Hag unan all deus e vugale, oa Louis e anv, ha hennezh oa bet "gouverneur" (gouarnour) deus un enezenn : "L'île de Corse" ; hag eñ 'ni eo oa bet da roiñ "bourse" (yalc'had) da Napoleon da vont d'ar skol, da Briennes, gav din, pe un tu bennak ar mod-se, e-lec'h e oa bet Napoleon o teskiñ bezañ soudard.

**Hag** e oa chomet ba' Kastell Gall dindan, papred dindan Pratulo ; met an hini diwezhañ deus ar re-se, deus ar ouenn-se, deus ar Marboeuf, an hini diwezhañ a oa lazhet ba' brezel ar Russie, ba'... enfin ! 'm eus ket soñj deus an anv, kaer, met ba' Retred de "Russie" oa-eñ lazhet papred Met 'benn neuze dija Kastell Gall a oa fermet araok oa... Kastell Gall ne oa ket... me n'ouzon ket hag eñ oa ur maner papred peotramant matrese 'benn neuze 'n doa komañset da gouezhañ dija ; met tro ar bloavezh seitek kant hanter bennak, Kastell

Gall 'benn neuze oa fermet dija d'unan a vize graet Théophile Postek des lles, hag 'benn neuze ar c'hoadoù a oa gwerzhet, of ! matrese tregont vloaz e oa pe 40 vloaz e oa, ha goude-se Kastell Gall 'n deus ket bet padet giz maner sañset giz maner bras, met eksept daou pe dri pe bevar c'hant vloaz setu aze tout pe... war-lerc'h eo-eñ kouezhet peuzfonnus da ferm, hag ne vize ken 'met peizanted 'barzh evel 'zo bremañ.

**MeB**, n'ouzon ket ba' pelec'h, peogwir keit eo bet Kastell Gall ba' Landelo giz maner bras, giz maner sañset priñsival ba' Landelo, nize droad ba' iliz, 'n doa droad ba' iliz Kerglov, 'n droad ba' ilizoù tout dre aze peogwir fermoù 'n doa partout. Met n'ouzon ket ba' pelec'h vize rentet ar Justis met me a gav din ba'... en dro da Gras Ruz ba' Landelo zo ur gwaremm a vize graet gwaremm ar Justis deus outi. Setu me a zo o klask gouzout hag eñ n'eo ket ba' eno 'ni eo e vize rentet ar Justis, hag eñ n'eo ket ba' eno e vize krouget an dud, hag-eñ n'eo ba' eno e vize ar pilev sañset evit lazhañ anezho neuze, ar re renke bezañ lazhet.

ECHU





### SEBASTIAN AR BALP

(Kontet gant Armand Puilhander)

Sebastian ar Balp oa chef deus ar Bodedoù Ruz. Ha ma 'peus klevet kaoz deus ar Bodedoù Ruz... un dra-se 'zo ur ravolet oa bet tro ar bloavezh 1675. Dre amañ 'giz-mañ vez graet Bodedoù Ruz... ravolet ar Bodedoù Ruz ; en-dro da Roazhon vize graet Revolution ar paper timbr ; hag, ba' brao Vigouden, moarvat, n' doaint ket Bodedoù Ruz, int 'n doa Bodedoù Glas ; setu vize graet "Les Bonnets Bleus" ba ' eno (peus ken 'met kompren bremañ).



Armand Puilhander o kontañ istor Sebastian Ar Balp

En Revolution oa partiet da zigentañ en-dro da Roazhon ha peuzfonnus war-lerc'h oa savet... -den ebet ne oar gwall gaer-peuzfonnus war-lerc'h oa savet ba' un ugent pe un tregont parrez bennak deus kreiz ar vro en-dro da Geraez. Hag aze he deus bet padet ar muiañ hag eo bet ar stantañ. Met dija tout ar Finister kazimant tout eksept Leon zo bet savet... en em savet d'ar mare-se. Hag ar re er em save -an dud lare deus ar paper timbr met an dra-se n'eo ket gwir- ar re en em save kalz deus an noblañsoù, kalz deus an droadoù vize lakaet war an holen, ("la gabelle" vize graet deus an dra-se) moarvat oaint menzheriet mat d'ar mare-se.

Hag o chef dezhe, war bep parrez ec'h ae da c'hoari war e v'maner ha tout ; met un devezh oa savet un chef dezhe, 'n doaint kavet unan a vize graet ar Balp deus outañ, "Sebastien Le Balp".

Hag hennezh, ar Balp, zo ganet ba' Kergloev ba' un ger ha vez graet Meilh Meur. E dad oa meilher ba' eno. Hag emichañs 'n doa Sebastian... erfin d'ar paotr oa roet un tamm deskadurezh bennak dezhañ peogwir, pa oa-eñ euredet, e dad -François le Balp oa anv an hini kozh- 'n doa prenet ur... -d'ar mare-se vize gwerzhet droadoù, droad da vezañ noter, evel vez bremañ, 'vez gwerzhet ur fenn emichañs-beñ ! e dad 'n doa prenet un "étude de notaire" ma 'peus c'hoant, gant unan kozh bennak, un noter kozh bennak deus kostez Karaez a oa o vont d'ober e dilez. An dra-se oa... vize graet "les notaires royaux", vize graet deus oute.

Ba' Karaez oa 28 bennak deus oute, dindan justis ar Dug, peotramant ar Roue (me n'ouzon ket petra eo gwall gaer). "M'enfin", ar Balp oa unan deus an 28. Hag en doa prenet droad da vezañ noter evit -me gav din- 1200 lur. An hini kozh oa sañset da roiñ 900 lur bennak, hag an tad kaer -peogwir ar Balp oa euredet d'unan a viz graet Anna Riou deus outi deus Magwaremm ba' Kergloev -hag an tad kaer oa sañset da roiñ- me gav din, 300 lur. Ha damañk 'larin deoc'h, 'blamour-se vez laret ar Balp zo bet ba'n prison. Bet eo-eñ bet met -matrese oa ar wirionez tu gantañ- matrese oa bet o klask laerezh, erfin gwelet 'vo damañk.

Ya da zigentañ oa deut da chom ba' ti e wreg ba' Magwaremm. Hag, war-lerc'h int deut da chom ba' Garzh-an-groaz, ba' Kergloz papsied. E wreg oa he anv Anna Riou ha tri grouadur 'n doaint bet asembles. Unan anezhe oa Marie, an hini all oa Claude hag ur verc'h 'n doaint bet da zivezhañ pell war-lerc'h, unan a vize graet Etienne deus outi. Met honnezh oa marv n'he doa ken met daou pe dri miz bennak. Ya, hag ar Balp 'tañ neuze (Ar Balp-se) oa pourchuvet, o ! pell war-lerc'h 'n doa prenet e studi noter, ar Balp oa pourchuvet gant an noter kozh -pas gant an noter- gant paotr an noter 'n doa gwezhet e studi dezhañ. Ar paotr, eñ oa beleg hag a lare :

- Of ! c'hwec'h pe seizh pe, me gav din, nav bloaz kentoc'h war-lerc'h 'n doa prenet ar Balp ar studi- a lare hag ar Balp 'n doa ket paet tout ar studi noter d'e dad dezhañ, da dad ar beleg.

Ar Balp lare yao, hag ar person lare nann ! Hag ar Balp 'n doa founnisset paper, ha pa 'n doa paseet ur "reçu" bennak emichañs, ha pa 'n doa paseet dirak an tribunal ba' Karaez, peogwir oaint aet da brosezit, A beñ ! ar "tribunal" 'n doa laret : ar paper 'n doa founnisset ar Balp oa faos. Setu 'blamour se, kazi sur ar Balp oa kaset d'an toull, me gav din da zigentañ da Vontroulez, ha benn ar fin da Garaez. Met feiz ! ur mare bennak oa eñ maez. Ha 'benn neuze oa ar Revolution "les Bonnets Rouges" ; ar beizanted oa o komarsal d'en em sevel. Hag hemañ, peogwir... Intelijant oa-eñ, un tamm deskadurezh 'n doa, hag, 'n doa ket riv d'e daoulagad anezhañ ivez, ben ! ne oa ket bet pell kemer ar penn deus outi. (d'e z/daoulagad).

En oa ar chef hag unan deus e letaned, hemañ oa deus Brieg ha me gav din 'vez graet e anv "Le Moign". Unan all oa kev met me gav din An Mogn, Ar Mogn Bras, gav din, vize graet deus outañ ; me gav din hennezh oa al letanant priñsial. Hennezh 'ni eo 'n doa foutet ar tan ba' maner ar Boissiere ba' Edern. Hag, ar Balp, lakaat ar tan 'ba un benn manerioù ; peogwir ar re-mañ lar a zo 65 maner a zo bet distrujet 'pad ar ravoll-se (dispac'h). Komarsed da sevel un arme peizanted ha lakaet ba' e soñj lakaat un dispac'h bras.

Lod lare oa-eñ sañset da c'hoari gant Anglichen, lod all lare : "Les Hollandais" oa sañset da vont da sikour anezhañ, h erfin, den ebet ne ouie gwall gaer, met erfin ar Balp ne ouie ket e-unan. Met Feiz ! 'Benn ar fin ba' Roazhon oa savet ar jeu, ha deut ar Dug de Chaulnes -Eñ oa "Gouverneur de Bretagne", pa 'n doa gallet lakaat ar peoc'h ba' Roazhon, eñ oa deut dre Gwened, dre Kemperle-eno 'n doa... moarvat 'n doa krouget un nebeut mat a dud- ha deut da Gemper.

Hag ar Balp, pa 'n doa gwelet anezhañ o tont warnañ lar d'e soñj : "Gast, lar, demaik me 'm eus ket soudarded d'avalc'h tre. Dav eo din lakaat un "appel" ba' tout ar parnezioù tro-war-dro : sonet ar toksiñ tro-war-dro, hag 'n doa lakaet... oa laret dezhañ 'n dije bet gallet kavout tregont mil peizant da sikour anezhañ. Setu 'benn neuze, ar Balp -laret 'm boa demaik oa-eñ intelijant- ar Balp 'n doa laret d'e soñj : O ! me rank tapout Karaez araok da zigentañ, tapout anezho mat, da gaout peoc'h deus oute, ha war-lerc'h ec'h an d'atakiñ Kemper hag an Dug de Chaulnes.

Met, ar Balp oa un den ha ne oa ket un den brezel anezhañ, un den ne oa ket un "chef militaire" anezhañ. Setu, d'an ampoent-se ba' Ti Meur ba' Poullaouen oa unan ha vize graet de Montgaillard deus outañ. Hemañ oa unan deus paotred ar C'hreisteiz. Eñ oa soudard, "officier de carrière" sañset. Met, pa va eñ ba' 'n arme dindan ar Roue oa bet torret peogwir, diouzhtu vize laret un dra bennak dezhañ, pe chef pe pas chef oc'h ober dezhañ, ben ! rae un "tournée" deoc'h. Ben ! 'n doa plantet un "tournée" ba' "tous les chefs" ha setu 'benn ar fin oa bet jetet maez deus an arme, ha oa-eñ deut da chom ba' ti e wreg ba' Ti Meur ba' Poullaouen.

Setu ar Balp lare d'e soñj : "ma mize gallet kavout un den ar mod-se da gomandiñ ma zud, evit mont hent d'an Dug de Chaulnes, peogwir me 'm eus un tamm mat muioc'h a soudarded evit 'n deus an Dug de Chaulnes, eh ben ! Ni zo o vont da lipat hennezh. Setu, eñ da gin de Montgaillard ba' 'n ti Meur. Met, pezh 'ni eo, araok 'n



doa loutet ar tan ba' n'ouzon ket pet maner 'm eus laret arak aze, hag ar peizanted hag eñ -kazi sur ar Balp oa da heul- ar peizanted oaint bet laerezh ba' n Ti Meur. Ha setu Montgaillard ne oa ket gwall gamarad gant ar Balp anezhañ.

Hag, un dra all oa c'hoazh : Montgaillard -laret 'm boa damaik oa-eñ bet getet maez deus an arme, arme ar Roue- hag 'n doa mil c'hoant da vont en-dro "dans la cour" ha tout an dra-se. Setu eñ lare d'e soñj : "Gast, lar, ma mize gallet dont 'benn deus le Balp, matrese ar Roue nize pardonet ac'hanon, ha matrese ben ! mize bet droad mont da baj en-dro. Setu, 'keit oa ar Balp diskutiñ deus outañ, ar re... lod lar oa ar Balp oa aet da sellout, unan bennak 'n doa galvet anezhañ deus an traoñ ; ar Balp oa aet da sellout dre ar prenestr. Pa oa troet e gear gant ar Balp, ben ! Montgaillard 'n doa lakaet e "épée" (kleze) treuz ha didreuz korf ar Balp. Lazhet ar Balp ba' ene.

Setu, tout ar soudarded, tout ar beizanted war-lenc'h, pa oa marv o chef -ar re-se oa tud n'o doaint ket "discipline" na sont ebet, ne oaint ket soudarded anezhe- pa oa lazhet ar chef, ar ravolt oa echuet a peu pre ar mod-se. An dra-se oa tro -me gav din- ar 2 deus a viz gwengolo, ya, oa-eñ lazhet d'an 2 a viz gwengolo, ar bloavezh 1675.

E gonf -ar Balp 'n doa... ouzhpenn tregont vloaz oa-eñ, tregont vloaz diazezet mat 'benn neuze- hag e gonf oa bet interet ba' Kerglov. An interamant oa graet ba' Kerglov d'an 4 mez Gwengolo. Hag ur mare bennak, pa oa deuit an Dug de Chaulnes ga' e droup, pa oa-eñ ur mare bennak pa oa-eñ digouezhet ba' Karaez, deus Kemper, oa graet ur prosez d'ar Balp.

U'ar Balp ne oa ket graet peogwir oa-eñ marv, met d'e gonf oa graet ur prosez. Setu oa dizinteret e gonf, graet ur prosez dezhañ ha kondaommet da vezañ lakaet war ur rod, ha da vezañ lakaet en-istribilh fas da... maner an Ti Meur.

Hag e gonf o chom, sañset da chom da vreinañ ba' eno evit deskiñ d'ar beizanted ha 'vit strombiellañ ar beizanted, ampechiñ anezhe da vont d'ober traoù ar-mod-se ken. Ha ba' Kerglov an deiz lenoz, ba' ur chapel -Sant Drezouarn vez graet deus ar chapel- n'eus ket keit 'zo c'hoazh 'oa penn un den marv, hag ar re gozh deus en dro da eno, ben ! lare : penn ar Balp oa-eñ. Ha dindan an diri, evel an da larout deuc'h damaik, dindan an diri mein 'zo ba' eno, ben ! vez diskouezhet ar mein bras lenc'h oa bet dic'houget korf ar Balp.



Chapel sant Drezouarn ba' Kerglov

Deus ar Balp 'vez kaozeet alies, met deus e wreg ne vez ket graet gwall alies. Ha koulskoude e wreg... ben Feiz ! e wreg he doa bet un tamm bugel dro a-walc'h peogwir, hi he doa bet un verc'h vihan -'m boa laret damaik, Etienneette oa hec'h anv- honnezh he doa bet un verc'h vihan d'ar miz Eost 1675 hag eo-hi marv an devezh arauk ar Balp, d'an 2 miz Gwengolo. Ar Balp oa lazhet d'an tri. Ar plac'h-tañ emichañs, Anna Riou oa hec'h anv, met n'ouzon ket peseunt plac'h oa honnezh peogwir miz Even d'ar bloavezh war-lerc'h oa euredet gant unan a vize graet Yvon Falc'hier deus outañ. Hag ar bloavezh war-lerc'h 'n doa bet un c'hrouadur. Ha goude-se he doa dic'hastet mat e-pad ur bloaz pe daou.

ECHU



**NOZVEZH KENTAN MA EURED**

(kanet gant Paotred Kere ba' Gouel ar Stank 1980)

An noz kentañ ma eured, ma 'ma konsantamant  
 Da servichiñ ar Roue, ret da vezañ kontant

Da servich' ar Republik, ret oa obeisañ  
 Ha ma dousig Franseza, chom ba'r gêr da ouelañ.

Heve, Teve Fransoazig, teve na ouelez ket  
 Ve a vo daou pe tri blâz, hep doned d'he weled

Easet e oa an tri blâz, ha pevar zo ivez  
 Hag ar martolod yaouank, didroig da vale

Ar plac'hig a oa yaouank, gave hir he amzer  
 Ha neus lakaet ba' he soñj, dimeziñ adarre.

Dimezet hag euredet, deus an daol o koaniañ  
 Ha 'n om gavas ar martolod, evit goulenn da lojañ

Digant ur vatezh vihan diganti neus goulennet  
 Daoust hag eñ c'hwi larfe din ha lojet e vin amañ ?

Oh nann sur 'ta martolod, amañ 'vefec'h ket lojet  
 Tud an eured zo deus taol, amañ vimp okupet


Ar martolod oa un den dous ha leun a garantez  
 Hag ar plac'hig 'n eus respontet "lojet e vioc'h amañ"

Ar martolod oa ur paotr fin, gout a rae an doare  
 Ha 'n om gave (ba 'e soñj) mont d'an ti a-gostez

Oh ! ya sur 'ta martolod ya amañ vefe lojet  
 Orru e oa ekselant, sambles gant tud an eured.



**NOZVEZH KENTAN MA EURED** ton tripl kanet gant  
 Paotred KERE ba' Gouel ar Stank, miz Eost 1980



GOUEL AR STANK



Dañs ar re wellañ ba' konkour gavotenn ar Stank.

GOUEL AR STANK

(gant Per GUICHOUX deus Landelo)

K (kuzetenn ar Menez)  
P.G. (Per Guichoux)

K : ba' peseurt bloavezh e oa bet savet ar gouel kentañ ba' n Stank  
P.G. : Ar gouel kentañ oa savet ar bloavezh 1971.

K : 'blanour betra oa bet graet ba' n Stank ?  
P.G. : ba' n Stank e oa graet dam oa ar bravañ tachenn e oa evit ober ar gouel.

K : peseurt mod 'poa kavet tud evit sikour ac'hanoc'h ?  
P.G. : ...goulenn tout ar re gave din a oa disponibl da zont d'ober un hanter devezh pe un mare giz-se. Tapet vize... memes lod o doa graet teir peder ywech hag vize galvet, klasket an eil goude egile, ar re ou "peuple disponibl" da zont.

K : Bez 'oa kalz tud ba' n reunion gentañ ?  
P.G. : evit ar reunion gentañ oa goulennet gant ar dud o doa c'hoant da sikour evit ober ur "syndicat d'initiative". Ar reunion gentañ ne oa ket bet kalz tud : dek matrese, 'n er ober tout. Ha warlerc'h neuze, eizh teiz goude e oa kaset bilhedoù d'ar re soñje deomp oa gouest da sikour, ar re... tud hag e oump a nize bet bolontez da sikour. Ha ba' n reunion 'tañ neuze e omp tre 45 pe 50.

K : bez 'oa bet ur bern tud ar bloavezh kentañ.  
P.G. : ar bloavezh kentañ, ya, oa bet kalz tud, muioc'h evit e oac'h o c'hanloz, kar bez oa bet sur tre 17-1800 tre yaouank ha tout.

K : ar bloavezh kentañ ne oa ket mann ebet ba' n Stank, ne oa ket lochoù ha traoù ar mod-se ?  
P.G. : ar bloavezh kentañ neuze e oa renket ober tout gant tentennoù.

**AR C'HLENVEDOU**

(gant Augustine Guyader)

"Ya, soñj am eus gwelout ma mañm ober, pa oan yaouank."

- Evit peseurt kleñvedoù vize graet louzoù ?
- Deus ar skoaret.
- Gant peseurt yeot (geot) vize graet ?
- Tri sort yeot oa deus ar porzh, ha deus an tier neuze oa c'hwec'h sort tra. Deus ar porzh oa louzaouenn an divilhenn, hini ar skoaret, ha louzaouenn al laerez. Ha deus...



*Louzaenn an divilhenn*

- 21 -

an ti neuze oa unan tamm deus ar chuberenn (skubellenn), nav greun holen glas, un tamm huzil deus ar siminal, hag un tamm deus al leur zi, un tamm deus troad an daol, hag un tamm kreun bara.

- Petra 'vize graet gant an dra-se ?

- Eh ben ! ar re-se vize despunet tout, ha vizont lakaet ba' un tamm lien ha vize graet un tamm sac'h lien aze deus al lien, ha vizont paseet an neudenn anezhe d'ober un tamm sac'h, lakaet anezhe tout 'barzh, ha vizont lakaet ar mod-se d'an dud neuze, peotramant d'al loened, ar re vize klañv.

Ha ser ober anezhe vize laret teir Me ho salud Mari, ser ober anezhe. Hag, pa vizont graet goude, vizont lakaet anezhe d'an dud peotramant d'al loened, ben ! vize graet neuze teir gwech sin "de" gras ser lakaat anezhe.

- Ha pelec'h oaint lakaet ?

- D'an dud vizont lakaet deus... 'n istribilh deus o hiviz ga' ur spilhen, ar mod-se ne vizont ket gwelet anezhe. Ha d'al loened neuze a-wechoù vizont lakaet gant un neudenn deus kelc'h ar gouzoug. Met a-wechoù kavec'h re anezhe a ziskrape setu denne anezhañ kuit, setu alies vizont lakaet 'n istribilh ba'r c'hraou.

- Ya, pet devezh oa dalc'het ar sac'h 'n dro ho kouzoug ?

- Ben ! nav devezh vize dav delc'hel anezhañ hag, war-lerc'h nav devezh neuze vize tennet kuit ha vize jetet ba' n tan, vize dav devañ anezhañ.

- Ha ma oaint ket pareet ?

- Ben neuze, vize dav ober c'hoazh, teir gwech vize dleet ober ma vizec'h pareet mat. Ha vize graet memestra.

e-ser lakaat anezhañ en-dro adarre. Teir gwech sin de gras adarre, memes mod vize graet.

- Ba' peseurt mare deus an deiz vize despunet ar yeot (geot) ?

- Pa vez kuzhet an heol 'blamour muioc'h vertuz he deus.

- Ha bez 'oa ur mare 'pad an deiz evit ober al louzou ?

- Pa vize kuzhet an heol eo, vize graet anezhañ pa vize kuzhet an heol.

- 'Blamour da betra ?

- 'Blamour, mod-all, 'n doa ket kement 'perzh.

- Ba' peseurt mare deus ar bloaz vize despunet ar geot ?

- O ! pad ar bloaz vez kavet deus oute.

- Pad ar bloaz...

- Ya, ya, 'pad ar bloaz 'vez kavet deus oute.

Bez 'zo takadoù 'n eus ket deus oute met, ba' r ger-se memestra, 'n ur glask mat, vez kavet.

- Peseurt mod skohlle an dud ?

- O, a-wechoù, evel ar vugale vihan aze, a-wechoù ma chom an dud par da sellout deus oute, hep larout Doue rae yec'hed peotramant dour benniget dezhe, ben ! a-wechoù oaint gouest da skoilhañ anezhañ. Peotramant a-wechoù al loened memes mod ivez, eh ben ! tapont un taol avel ba' 'n ene ba' lec'h vize re yen.

- Evit an dud ivez ?

- An dud memes mod ivez ya.

- Kalz tud rae louzou ar mod-se ?

- O ! ne gav ket din moarvat, 'm eus ket bet klevet a raent 'met unan c'hoazh, ha ma mamm rae neuze sur. Met mod all n'ouzon ket ma raent, 'n eus ket bet ouiet gwech ebet.

- Ar re teue da gavout ho mamm evit kaout louzou roe arc'hant.

- O ! an dud vize kontant sertainamant c'hat, ne faote ket dezhi kemer nann ebet digant den ebet, met, an dud vize kontant pa vident pareet setu roent un tamm gwerzh butun dezhi, peotramant lod all a-wechoù zegase ul lur amann, pe un dra bennakat da "rekonpansiñ" anezhi. O memesmod, rekonpansent anezhi mat pa vident pareet.

- Ho mamm rae louzou evit al loened ivez ?

- Ya, ya, memesmod ivez evel evit an dud ivez memesmod vize graet.

- Gant piv he doa bet desket ober louzou ?

- Ben ! digant he zud ivez, digant he mamm he doa hi bet desket ober ivez.

- Kalz tud teue da gavout ?

- O ya ! dont a rae forzh

- Tud klañv teue papred da gavout ho mamm peotramant hi ae 'wechoù da welout anezho ma oaint gwall glañv.

- O ! hi n'ae ket ! an dud teue ; a-wechoù teue ; a-wechoù teue o mamm peotramant o zad, ur c'hoar bennak dezhe erfin unan bennak deus o zud teue.

- Ho mamm ouie ober louzou all evit ar c'hleñvedoù all ?

- Nann, nann, ne rae ken 'met deus ar skoaret, ne rae ket met deus an dra-se. Ya, met laret vize din, peogwir ma mamm he deus bet klevet larout alies sur : lakaat un tamm kreun bara ba' ho kodell ha yit rout da bourmen, ar mod-

se an dra-se harz ac'hanoc'h da skoilhañ ba' un droug, gouzout piv ma chom an dud da sellout deus oudoc'h , rayo ket tort bet deoc'h. Un tamm kreun bara ba' ho kodell, an dra-se ampech tout 'vez laret.

Evel deus ar boan gein aze, deus ar boan izili oa un dra a oa mat ivez : kerc'h kraz, e vize krazet kerc'h war an tan ha vize lakaet anezhañ ba' un torchour hag e vize paket an torchour en-dro dezhañ, vize lakaet peder spilhenn ba' pep korn evit ampech ar c'hrec'h da zont 'maez, ha vize pozet anezhañ ar mod-se war gein, ba' dindan an hiviz war 'r c'hroc'hen vizent lakaet anezhañ 'giz-se, ha vize lesket anezhañ keit vize tomm anezhañ. An dra-se oa mat-tre evit ar poan gein, an hini nize poan gein alies.

- Petra vize graet evit ar wenaenn ?

- Ben ! evit ar wenaenn 'm eus bet klevet ha oa mat... evit ar gwenoù (gwenaennoù) peogwir gwenoù vez graet deus an dra-se, ur wenaenn vez graet pa vez ken 'met unan met ar mod-all vez graet gwenoù deus oute.. 'm eus klevet ha vize mat sur, ma zegouezh un hent ba' lec'h 'zo ur wazh dour bennak, ba' lec'h eo eñ aet an dour, met ma zegouezhec'h neuze, hep mont da glask, kar ma yit da glask n'eo ket mat ivez. Ben, frotiñ an eon deus outi e vez laret ec'h a kuit.

- Gant an eon ?

- Ya, an dra-se 'zo mat-tre, met pas ma 'it da glask anezhe, ma zegouezhec'h, nes gouzout dare deoc'h.

ECHU





\*

AR C'HLENVEDOÙ



Augustine GUYADER

\*

AR MEL

(gant Henriette Marzin)

Ya 'vat sertenamant 'm eus soñj gwelet vat oc'h  
 a ja vat sertenamant m aes sozj fye:l hat  
 ober gant ma zad 'nae ar goloenn ha tout, setu taolioù-gwenan 'oa fout  
 h:ar ga me dad re: ar gôlō:n a tut 'sete 'tolju gye:n oa fut  
 pegement pa veze deut ar mare da lazhañ anezhe e-barzh miz gwengolo pa  
 'piēm'n pe vij dōd a ma:r de law ne ba mij yengolo pe  
 veze ket ken gwinizh-du peogwir ar gwenan az ae war c'horre ar gwinizh-  
 vi ce cin 'gyinis ty 'peir a gye:n he: var gor a gyinis  
 du du glask o boued 'ta. Setu pa veze ket ken boued, troc'het ar gwinizh-  
 ty de glasg o bwet ta SE pe vi ce cin bwet troh a 'gyinis  
 du, setu 'veze deut ar mare da lazhañ ar gwenan neuze.  
 ty 'sete vij dōd a ma:r de law ar gye:n nœh

Setu veze prepañet, neuze veze graet un toull ba'n  
 'sete vij prepa:rd nœh vi gre on tul ba'r  
 'andin, diouzh an noz ez aer d'ober pa vezent aet tout da gousket neuze,  
 ze:rn dœh noz he:r d or pe vip Et tut de gu:see nœh  
 mod all e vijomp bet flemmet gante. Setu veze graet un toull ba'n douar  
 mod al vim be 'flemmed gate 'sete vi gred on tul ba'n douar  
 neuze, hag e veze lakaet tri broch keuneud ba'n douar hag e veze lakaet  
 nœh ag e vij 'la:ket tri broj cē:nd ba'n douar a vij lak  
 ar soufr. Ha ma zad gant un vouestad alumetez a c'hwezhe ar soufr, a  
 ar suf a me dad ga r west alymets hwe:h er suf a  
 daps ar goloenn a-zwar ar pont neuze ha lakae anezhi war he genou ba'n  
 'da:pe r gôlō:n ziva r pōnt nœh a 'lake nei va e 'hi:nu ba'n  
 toull. Ar re-se vezent ket pell anezhe, mouget 'vezent diouzhtu gant  
 tul a re h vip ce pe:l ne 'mu:ged vip dox'ty ga:  
 ar soufr ha setu hemañ gant ur skouarn da selaou anezhe ha da welet pen  
 r suf a 'sete hem ga or 'skouarn de zilaw ne a de vel pen  
 da vare vije moien sevel ar goloenn hag eñv vezent marv tout, hag eñv  
 d var vij 'mojen ze:vl ar gôlō:n f eñv vip 'ma:rw tut f eñv

ne glevemp ket anezhe ha pa veze ket klevet ken hini ebet, setu 'veze cheñchet  
 'glejenn ce ne: a pe vi ce Klēt cin hāē bet 'sete vi ʃēʃ  
 tu d'ar goloenn neuze, hag e teuemp en ti gante neuze ha 'veze lakaet neuze  
 ty dar gōlō:n nōēh a 'tēpenn ti 'gakte nōēh a vi 'lakēt nōēh  
 'vit tennañ ar c'hoar e-maez deus ar goloenn neuze ha veze lakaet ba' un  
 vi tēn ar xwar me:z dōz ar gōlō:n nōēh a vi 'lakēt ba on  
 tamouez ha lakaet an tamouez a-us ur sailh neuze eh... da... dōm d'ar mel  
 'tā:wēs a 'lakēd an 'tā:wēs ys or za:l nōēh ε: dē: dām dar me:l  
 da zont 'maez deus ar c'hoar a-hed an noz ha 'veze flastret ar re-se neuze  
 d zōn me:z dōz a xwar he:d o noz a vi 'flastre re:s nōēh  
 gant ul loa goad 'blam dezhe da zont e-maez ar lonusañ ma c'hallent neuze.  
 gā ol lwa gwat blām dē dē zōn me:s fōnys ma halep nōēh

Setu goude-se neuze an deiz war-lerc'h vintin neuze pa veze  
 'sete 'guze nōēh n de var léʒ 'viltin nōēh pe vi

leun ar sailh mel neuze, veze dav lakaat anezhañ ba' podoù ; ba' Kontun  
 loēn a za:l me:l nōēh vi daw lak nāw ba 'poidu ba Kōñtun  
 ba' du-mañ neuze veze lakaet anezhañ ba' ur c'helonn neuze peogwir 'veze  
 ba dy:m nōēh vi lak nāw ba or hi'lo:rn nōēh 'peñir viz  
 kement all : 'vezent ket lazhet tout anezhe sertenamant, bez 'veze teir  
 cem'del vip ce 'la:et tūt ne serte'nāmn 'vize 'tejer  
 pe peder vamm 'blam da zalc'her ar gwenan neuze evit ar bloaz a zeu.  
 pe 'pi:der vām blām dē zah ar gwē:n nōēh vi ar bla: zō

- Ba' peseint mare vize graet ar mel ?

- Ba' miz gwengolo. Miz gwengolo, ya, pa vez donnet  
 ar gwirizh.

- Kalz tud a rae mel, war ar maez ar mod-se ?

- O ! ya 'vat, tanv oa ar plasoù ne oa ket gwenan.  
 Hag ar re-se, pa vize ur taol gwenan, kontunu ba' miz eost pa vez tomm  
 hardizh, veze laret deomp : "n'ez ket re..." pa ez ae ma zad ha ma mamm  
 d'ar park da labourat. "N'ez ket... gwall re bell eo, ha chom eno 'n  
 dro kêr gant aon e savo ur taol gwenan".

Setu e save ur taol gwenan, e veze dav deomp plasañ  
 an trebez ha neuze an alc'houez evit skoñ dezhe, d'ober trouz dezhe  
 'blamour dezhe da bozañ war ur wezenn brun pe ur wezenn avaloù. Mod all,  
 ma welllec'h anezhañ o vont kuit... ez aen lonnus da larout da ma zad  
 da vont d'ar gêr : emañ ar taol gwenan o vont kuit.

Ya, pa teuemp a-benn da zalc'her anezhañ ba'n gêr  
 ni 'veze fougeet. Pa teue eñ da zebriñ e verenn vihan, o sell : aze emañ.  
 Neuze vize klasket ur goloenn doc'htu neuze ma zad ouie lakaat ur banne  
 laezh ba' e genou -'m eus soñj gwelout anezhañ- ha 'strinke ur banne,  
 flabouse ur banne laezh ba'n goloenn 'blamour dezhe da zont 'barzh da  
 gaout ur tamm boued. Ha setu vize lakaet ar goloenn ba' beg ar forc'h  
 ha vize hejet anezhañ -ar taol gwenan neuze deus beg ar wezenn avaloù  
 neuze... ha lakae ur sac'h war e benn ha war e flas, hag ul loeroù lakae  
 eñ war e daouarn- 'm eus soñj gwelet anezhañ lakaat loeroù war e daouarn,  
 blamour dezhe... 'blamour dezhañ pas bezañ flemmet gante. Setu, pa veze  
 hejet mat, veze taolet en-dro ba'n pont neuze ha taole ur tamm plouz  
 warañ hag ur mell maen peotramant ur golo kuit d'ar glav d'ober warañ.

- Petra vize graet gant ar mel ?

- Ni ouie lakaat anezhañ war hor bara, peotramant  
 pa veze enrhmet ar dud : ba'l laezh tomm deus ar goañv, deus noz araok  
 mont da gousket aze.

Ma ma zad rae ar goloenn e-unan, vize plouz hir, vize oc'h ober ba' n bern plouz, 'm eus soñj gwelet anezhañ o klask ar plouz hir ha drez ; 'vize faotet an drez ha vizent lakaet da sec'hiñ ba' mantel ar siminal, hag an dra-se e vize eñ oc'h ober.

- C'hwil 'peus laret alies vize lakaet ar goloenn war ar pont. Petra eo ar pont ?

- Ar pont, evit pozañ an taol gwenan, e vize lakaet daou maen ha lakaet ur mell maen bras goude-se, unan ront neuze, ha war, ha war hennezh vize paseet ar goloenn, ha war gorre ar goloenn vize un tammig toull dre lec'h ez ae ar gwenan ba'n goloenn neuze, ez aent ha teuent maez da vont da glask o boued.

ECHU



AR WENN AVALOU

(gant Anna ROLLAND)

Kanomp bep ur ganaouenn, kanomp war un ton trist  
Kouezet eo ar wenn avalou, war 'r bloaz-mañ no ket chistr

Un devezh glav hag avel, e-kreiz miz gwengolo  
Ar maleur oa degouezhet war ar wenn avalou

Ar maleur oa degouezhet, bremañ war mamm ar chistr  
! kredit da lonkerien, evidomp a vo trist.

Ma-unan pa 'm oa klevet ha oa kouezhet ar wenn  
Ar bloaz-mañ vo dizonet tout an holl vambocherien

Kreiz ha kalet eo klevet rentañ kont deus ar maleur  
Da degouezhet an deiz all en tu nec'h deus al levr

Honnezh a oa 'r c'haerañ gwenn, a oa 'barzh ar vro-mañ  
Da 'n eus lakaet kalz tud, alies da ganañ

Da ganañ pe da zañsal, pep hini hervez e vro  
E 'z eo H. al Lonker me am eus graet ma lod

Galoupet am eus tammoù, partout demeure ar vro  
E gaven netra gwelloc'h 'vit ar wenn avalou

Ar chistr a zo ul likeur, ya pa va lesket pur  
Da galz a Vretoned 'n eus graet kalz plijadur

Met pa vez brein he gwrizioù vo ret d'ar wenn kouezhañ  
Kaneomp eta tud yaouank a c'hoarvezho memestra

An dra ra deomp da gompren n'eo ket homañ aze hor bro  
Koulz 'vel ar wenn avaloù, tout a ni finiso

Ne a zo bet komafiset da ober ma micher  
Ma c'hallin kaoued ur plac'h, ne vanko dezhi mizer

An den 'n eus graet ar zon-mañ zo un den bras a spered  
A zo savet a-viskoazh e-mesk ar Vretoned

Sant Yann deus an Toull-dous, Belvue hag ar Vouchenn  
Ar re-se zo en-dro din-me e-giz ur gurunenn

An anv da Zoue pa vin marv, sonet ket kleier din  
Ar gwin hag ar boutailhoù, ar re-se a sterlinko din.

ECHU



NOTENNOU

wenn : wezenn	kalez : kalz
'm oa : am boa	demeus : deus
no : ne vo	koueet : kouezhet
kaoued : kavout	'n eus : he deus

DISTAGET

bloaz : bliâ	galv : glao
avaloù : avalo	honnezh : houzh
gwrizioù : gwrioù	kouezhañ : koueo.

**GAVOTENN (BINIOU)**

( Le Meur - Toutous )

An ton doupl-mañ 'zo bet sonet gant Yann MEUR ha Mich TOUTOUS ba' Gouel ar Stang  
ha ba' n F.D.-F.N. da Sul Fask ba'r C'hastell Nevez. Ar renkamanchoù 'zo graet gant ar sonerien war an  
tomb.

The musical score consists of ten staves of music in a single system. The notation is in treble clef with a key signature of one flat (B-flat). The melody is written on a single line, with various rhythmic values including eighth and sixteenth notes, and rests. There are several dynamic markings and phrasing slurs throughout the piece. The score ends with a double bar line.

**RIMODELL AL LOENED**

(gant Per Poher)

☉ ya ! me a da larout un tamm rimodell verr deoc'h a zo bravoc'h evit an dra-se. Met e-barzh homañ 'neus ket kaoz an diaoul ba' enni.

- Gant ar veleien ?

- Nann, nann, ar veleien n' eus ket ivez. Matrese c'hwi 'peus klevet honnezh ivez.

- O ! Me 'm eus klevet traoù, met 'm eus ket klevet tout an traoù c'hoazh.

- Nann, nann, met homañ 'zo un tamm hini verr

☐a' foar ar C'hastell Nevez ouzoc'h awalc'h ba' Duchenn C'hlas amañ, neuze oa ar plas ba' traoñ amañ 'giz-mañ. 'Benn neuze ne oa ket graet...

- Ar voutig bras ba' nec'h...

- Nann, ar "machine" petra du-se, n'eo ket ar rallye eo-eñ. Bon !

- N'eo ket kazino eo ivez !

- A nann ! n'eo ket kazino. Neuze oa an traoñ amañ ba' dindan ar gwezoù, ar saout...

- Bremañ n'eus ket gwez ken...

- Ar saout, ar moc'h, ha tout e vezent eno. Deñved veze ivez. Ha vez ar g... bras o klask kaout anezhe evit netra. Setu, ba' Duchenn C'hlas amañ neuze oa an hini gozh o talc'her ar bistrot, peseurt anv oa honnezh... gwreg Herve Direson, honnezh

oa o talc'her... vize graet an Hotel deus an dra-se, 'lec'h 'mañ -petra din-me bremañ- Pierrot Kourte. Bon, setu oaint eno, degouezhet aze o daou. Ar re-se oa bet ober o c'honjeoù asambles ha n'o doaint ket en em welet n'ouzon ket pegeit oa !

☉setu dav mont d'evañ ur chopin koa ! Bon, setu ez aent ba'r bistrot. Setu oa evet daou -ouzoc'h awalc'h- pep hini 'n doa paeet e "dournée". Setu, goude-se, pa oaint deut war ar ru en-dro, o kontañ kaoz, unan anezhe lar d'an hini all :

- "Met, lar eñ, o sellet deus outañ aze, met... loened 'zo ganeoc'h ?"

- "N'eus ket, mallozh an Doue, ha gast ! kar chañchet 'm boa ma roched 'benn dont deus ar ger !" lar eñ.

ECHU



RIMODELL AL LOENED



Per POHER

SON MENEIOU KERNALL

Ha pa oan 'n oad da eiz vloaz, d'ar skol me oa kaset  
Deskiñ lenniñ ha skriviñ, koazeal ar galleg

D' an oad a bevarzek vloaz, me oa kerc'het d'ar ger  
Deskiñ labourat douar, honnesh eo an tristañ micher

Ha pa oan kerc'het d'ar ger, vizen o tiwall ar saout  
Vize ganin peder buoc'h laezh, un armoarig, ur maout.

Vize ganin peder buoc'h laezh, un armoarig vihan  
Vize ba' lein beg ar menez, o tiwall ne ma-unan

Ha deus beg lein ar menez, me wel ar vro tro-war-dro  
Ve rae ma reflexion war marvailhoù ma bro

Gwel a raen tour Lansignag, Plouie ha Poullaouen  
N' eur ober ur sell a gostez, me wel Plouie deus Kleden

Gwel' a raen Mene'ioù Gourin betek Roudoualleg  
Hag e tuchenn sant Mikael, ur c'hornat mat deus Speied

Ha pa oan me pemzek vloaz, 'oan ket ken ur paotr saout  
Dan komañset da zañsal, un tammig gant ar merc'hed

Pe oan-me c'hwezec vloaz, o renañ ma seitek  
Ve 'ma choazet 'giz mestrez, ur vravig garfantenn

Ve 'm oa choazet giz mestrez ur vravig garfantenn  
Hag he blev a oa melen, melen ma oant frizet

Hag he blev a oa melen, melen ma oant frizet  
N' daoulagad oa 'n helfenn evel div steredenn

N' daoulagad oa 'n helfenn evel div steredenn  
E soñje din e oa un ael deus an neñv diskennet.



Devezh pardon Landelo, na goude ar gousperoù  
E remerkas ma mestrez, ober tro ar ruioù

E remerkas ma mestrez, un nebeut kanfarted  
Ur nebeut paotred delikat, deus kostez Kolloreg


Ar devezh warlerc'h vintin, kerkent 'vel ma oa sklaer  
Ar c'hentañ tra ha miou graet : skrivañ de'i ul lizher

De'i war al lizher-se, serten me miou lakaet  
Birvikien na james, 'teuñ ket ken d'ho kwelet

Ma mestrez zo ur plac'h vray, memes eo-hi digourdi  
Karefen memes kousket 'sambles ganti

Karefen memes kousket nos er gwele  
Trotañ de'i penn he daoulin, bouchoù de'i bep mare

Kanet gant Paotred Bernard deus Plone  
ha kompozet gant Nedeleg deus Landelo.



SON "PAOTRED AR C'HOAD"

# Son "Paotred ar C'hoad"

Son Paotred ar C'hoad kuzh : F.F.P.  
hañ F.F.I. eus Gwiraraz, Kêrber, ar Po-  
rest ha Landelo.



Diskan

Sella ! Brao-brao ! Paotred ar C'hoad  
You, dir ha dir ha an  
Sella ! Brao-brao ! Paotred ar C'hoad  
O vont holl d'an emgann

O Breiz-Izel, o kaer bro,  
Kinklet ebouek ha dispar !  
O Breiz-Izel, o kaer bro,  
Pou glazek ho rikar. ?

Mouza glazek naka tud Vreiz  
Ha krenna berr o fri ?  
Kenloc'h ni n' emganno nos-deiz,  
Hep kousket na debri !

Tan zo war vor tan zo en ar  
Hag e pen korn d'ar bed  
An drouk-epored, n' em chriet boer  
Laz an hol war o led.

Eur c'haolig ar hanvet Hitler,  
Ora eus Breiz eur garnel !  
War sio paotred, ha d' en er  
Harp d'hor mamm Breiz-Izel !

Mtalin Laval, ha ped Judas  
Deus gwerret hon enor  
Ar groud zo eor an dud ganna  
E Fiana ha en Arvor !

Chouezomp an tan war bep ment,  
Chouezomp tan ar breiz !  
Tant-e-argad 'vel ar menez,  
Gant lozh-seu d'hor gervel.

O Breizad, ni tud Karet,  
Daoust ha ni vo trechet ?  
Vit Breiz dalc'hmañ ha Fiana o pred,  
D'ar c'hoad, d'ar c'hoad, paotred !

Kereze vezo hanit Hitler,  
Merev bras an Antoku !  
Ni n' em zidleo war da ler,  
Ha war ler da zadoù !

Mur a vil e Boch, ne'z sint ket kuit  
Va chieze zo ruz-gil !  
O gwad a muih, va bro, bevit !  
Bevit, o Breiz-Izel !

Franz ha Breiz-Izel, vel diou c'hoar,  
A gerz bro dom-da-dom,  
Baz d'an trubard, d'an den digar  
Deus gwerret pañ ar for !

Dukennez ez ni d'an Kem  
Micherese Franz ha Breiz !  
Baz ar garnel, mait, vev-da-vern,  
Boued-kon ha boued-ar-breiz !

Diskan-diveza  
Setu aman Paotred ar C'hoad !  
You ! dir ha dir ha an !  
S tu aman Paotred ar C'hoad,  
Oant maout an emgann !

AR GWIR-GILBOG,  
bars Landelo



NOTENNOÙ DISTAGañ

KAOZEET

ba' r gêr  
 ga'n  
 'n dra-he  
 'vit  
 ahe  
 neuhe, neuñ  
 matrese  
 eu  
 'bet  
 de  
 pe, be  
 'benn  
 'raok  
 d'hont  
 biã  
 kim  
 me zo 'tebi  
 nez  
 hem', houm'  
 dam  
 blam' bet'  
 azeo, azeet  
 poeo, poët  
 kleo, kleet  
 aneo, aneet  
 lar't  
 bez'  
 teuiñ  
 kleñvejoù  
 na  
 na  
 naint  
 raolt  
 saët  
 pe

SKRIVET

e-barzh ar gêr  
 gant an  
 an dra-se  
 evit  
 aze  
 neuze  
 marteze  
 ivez  
 ebet  
 da  
 pa  
 a-benn  
 araok  
 da vont  
 bloaz  
 ken  
 me zo o tebrif  
 hennezh  
 hemañ, houmañ  
 abalamour  
 abalamour da betra  
 azezañ, azezet  
 poazhañ  
 klevout  
 anavezout  
 larout  
 bezañ  
 teuziñ  
 kleñvedoù  
 'n doa  
 he doa  
 o doaint  
 ravolt  
 savet  
 pa

de, deu  
 warneñ  
 parrezioù  
 on, o  
 kao  
 chetet  
 c'hañ  
 diazeet  
 benn neuñ  
 bez = be  
 vi  
 d'hont (dont)  
 deskuet  
 hon'

da  
 warnezañ  
 parrezioù  
 un  
 kaout  
 jetet  
 ac'hanon  
 diazezet  
 'benn neuze  
 bezañ  
 evit  
 da vont  
 diskouezet  
 honnezh

- NOTENNOÙ POCHOÙ -

SEBASTIAN

da gin  
 matrese  
 ar plac'h-tañ  
 papred  
 ba'  
 mize  
 nize  
 vize

davet  
 marteze  
 ar plac'h-mañ  
 bepred  
 e-barzh, e  
 am beze, am bize  
 en defe, en dije  
 veze.

AR C'HEÑVEDOÙ

ur skoaret  
 laerez

e galleg : un sort (jeté)  
 e galleg : panari

AR MEL

kontunu

a-gustum

**TAOLENN**

DRE RENK

LODENN 1.

Ur poz arak.....	P. 3
Istor Kastell Gall.....	P. 5.6.7.8.9.
Istor Sebastian Ar Balp.....	P. 10.11.12.13. 14.15.16.
Gavotenn "Nozvezh kentañ ma Eured".....	P. 17
Gouel ar stank.....	P. 18.19.

LODENN 2.

Ar c'hleñvedoù .....	P.20.21.22.23.24.25.
Ar wenn avaloù.....	P.26.27.28.29.
Ar mel.....	P. 30.31.
Ton biniou.....	P. 32
Rimodell al loened.....	P. 33.34.35.
Son "Meneioù Kernall".....	P. 36.37.
Son "Paotred ar C'hoad".....	P. 38
Notennoù.....	P. 39.40
Taolenn.....	P. 41.

LEVRIG SAVET GANT "KAZETENN AR MENEZ" ha "SKOL AN EMSAV"

MIZ DU 1980

eil embannadur-gwengolo 1992



# Gouel ar Stang

